



ITRON VARIA AR VUR,
PEDIT BFIDOMP.

RECIT CURIUS

*Eus ar pez a zo bet êruet e Montroulez var
sujet ar Religion, adalec ar bloa 72 goude
Guinivelez hor Zalver, betec an 8 a vis Guen-
golo, deiz Gouel ar Verc'hes, er bloa 1834.*

Var ton Christ Bras ar Vur.

GUERC'HEZ glorius Vari, Patronez Montroulez,
Gc'houi a voe en peb amzer hor guir Advocadez,
Deurvezit, mar plich ganêc'h, cundui va fluen,
Ma rûn amàn ur recit d'am breudeur Christenien.
Anes ho protection, ô Guerc'hez adorabl!
Daouest d'am oll bolonte, biqen ne ven capabl
Da zonet da gomposi d'am brois ur recit
Pehini a vez eavet beza dign a verit.

Mes, crén demeus ho sicour, e zàn da zisclêrya
Traou hac a interesso Christenien ar vro-mâ :
Mont a ràn d'o merqa dêc'h amâ var ar paper;
Selaouit oll, me ho ped : antren' ràn en matier.

Brenàn'eta, Bretonet, vit rêy dêc'h da entent,
E zeus just seitec cant vloas ha tri ha tri-uguent;
E tiambarqas amàn, evit hor boneur-ni,
Drennalus, qenta Disqib Joseph d'Arimathi.

Qerqent e convertissas an oll Vôntroulezis,
Hac er penn eus ar C'hoc'hi e constru un Ilis,
Pehini voe dediet d'an Autrou Sant Jacques :
Ar guenta Ilis Christen eus a guær Montroulez.
En traon eus ar ru Feunteun e sao ur golonen,

Var beg pini e laqas neuze Croas al Letern,
 Hac eus an troad e plaças guir bortret Mam Doue,
 Elec'h ma talc'het goulou hac en nôs hac en de.

Aben nao bloas ha trêgont goude maro Jesus,
 E voamp-ni ta Christenien, dre soignou Drennalus;
 Se a voe abeurs Doue ur bredilection

Da veza bet qerqent-se ar guir Religion.

Ar Feiz o veza cresqet er guær a Vontroulez,
 E teujot da vatissa hon Ilisou Pares,
 Couentchou ha Chapelou, dre zêl ar Vourc'hisien,
 Voa devot bras d'ar Verc'hes, ha scüer d'ar Gristenien.

Er bloavez unec-cant-dec, voe da guenta fontet
 Bars en Ilis Sant Vaze Breuriez an Drindet.

Sant Martin, Sant Malan, Sant Jacques, Sant Vaze
 A voa peder Prioldi a Venac'h d'ar c'houlz-se.

Hac er bloavez daouzec cant eiz ha trêgont voe grêt
 Couent caer Sant Dominiq, ha qerqent dediet.

Eno voa Pales an Duc, e verger, e jardin;
 O rêi oll a ras d'ober un Templ d'hor Mestr divin.

Gant plijadur, Bretonet, e cléfot, m'en assur,
 Peur e voe fontet Ilis Itron Vari ar Vur :

Er bloa daouzec-cant pemzec ha pêvar-uguent voe
 Commancet Ilis Mari, Mam d'an Autrou-Doue.

Deiz Gouel Mari Anter-Eost voe fontet ar Chapel,
 Er plaç choazet gant an Duc, en traon eus ar C'hastel;
 Laqat a ras eiz Bêleg vit ober an Offiç,
 Ar pez a gargas a joa an oll Vontroulezis.

Ar Gouel-mâ voe digoret dre ur Procession,
 E pini voa ur foul vras, leun a zevotion :
 Er penn arauc voa an Duc Yan daouvet a hano,
 Bêleyen ha Bourc'hisien, hac oll Noblañç ar vro.

Ar Provincial a Franc voa an eil asistant,
 Escop Dol, Escop Naonet a voa ive present,
 Guillou eus ar Roc'h-Tanguy, Escop eus a Roazon,
 Ha Guillou a Kersauzon, Escop eus a Leon.

Unec vloas ha tri-uguent goude ar Gouiel caer-mâ.
 Deiz Anter-Eost voe placet neuze ar men qenta
 Eus ar Porchet manifiq demeus Ilis ar Vur :

Qementse so affirmet deomp oll dre scridou sur.
 Demeus Ilis Sant Vaze voe neuze transferet
 Da Ilis Vari ar Vur Breuriez an Drindet,
 Elec'h ma zeo bet heuillet gant guir devotion,
 Bete ma voe commancet ar Revolution.

Er bloa pêvarzec cant eiz ha tri-uguent e voa
 Dediet Ilis ar Vur d'an Itron Varia :

Ar vrassa solemnite a voe neuze eno ;
 Tud a voa en em gavet a bêver c'horn ar vro.

Ur bloas ha trêgont goude e voe fontet enni
 Breuriez ar Chandelour, en enor da Vari,
 Dre ur Bul demeus ar Pab Alexand c'houec'h hanvet ;
 Guillou Guicaznou'r, Provost, en doa e goulennet.

Dec vloas goude, a nevez e rejot construi,
 Divar goust tud ar baros, Ilis Sant Malani ;
 An tour a voe construet ive neuze ractal,
 Ha Chapel Santez Barba e qichen an nor dâl.

Yan Calloet a Lannidi, Escop a Landreguer,
 A zedias Sant Vaze qazi'r memes amzer,
 Hac a fontas diou zervich evit ar re varo,
 Ar pezh a gresqas fervor Christenien vad ar vro.

Ebars er bloavez pemzec cant eiz ha daou-uguent,
 En dec eus a vis Gouere, dre c'hraç Roue ar Zent,
 Voe batisset an Tour caer a Ilis Sant Vaze,
 Pini hon eus ar boneur d'admira c'hoas hirie.

Er bloa c'houezec cant unec neuze e voe poset
 Ar men qenta fondamant eus ar Gabucinet.

Ur gurun an horrupla, seiz vloas just goude se
 A ziscar beg Tour ar Vur : an oll a spouronne.

Unec vloas goude'n dra-mâ, Couent caer Sant Frances
 A voe neuze construet, tostic da Vontroulez ;
 Hac aben daou vloas goude, Autrou Escop Treguer

A ras ur brocession partout en dro da guær.

Demeus a Ilis ar Vur e toug ar Zacramant,
Gant calz a solemnite hac ur galon fervant,
Betec Ilis ar Feunteun, elec'h m'oe instalet,
Goude an Offiç divin, ar C'harmilitezet.

En c'hozec cant eiz varnuguent, Processionou qær,
Deiz Sul ar C'hasimodo, n'em rentas er C'halver,
Evit beniga Croas ar Venedictinezet,
En penn eus ar ru Blouyan, e pelec'h voe plantet.

En Montroulez e zeus c'hoas bet, mes pell goude-se,
Goueliou caer, Missionou, dre ar c'hraç a Zoue.
An dud côs a Voutroulez n'o deus get sur ancouet
Sant Fidel ha Sant Lauranç eus ar Gabucinet.

Pêvar bloas ha tri-uguent so voe Sant-Martin dêvet,
Gant an tan eus an ênvou voa varnezi coezet;
Ur bloa varnuguent goude voe grêt unan neve,
A zo ur pez ar c'haera a veler er c'hontre.

Qent ar Revolution e velet er guær-mâ
Chapelou ha Couentchou, Ilisou ar c'haera;
Pere a vije carguet bepret a dud fidel,
Da zervichont da exempl d'an oll en Breiz-Izel.

Trivac'h Ilis ha Chapel voa en dalc'h Montroulez:

Ilis ar Vur viniguet voa evel ar Vestrez;
Sant Vaze, Santez Mac'harit, Ilis Sant Dominiq,
Hac en traon voa'r Chapel gôs a Zantez Veroniq.

Ar Gouent, Santes Martha, ar C'harmilitezet,
Ar Vadalen, Sant Nicolas, hac ar Gabucinet,
Ar C'halver, Sant Malani, Sant Frances, Sant Martin,
Itron Vari a Vertu, Chapel Sant Augustin.

En Hospital voa ivez ur Chapel ar gaera,
Hac etal Sant Malani hini Santes Barba,
Ah! nac a blaçou zantel a voa en amzer-se,
Elec'h ma rentet bemde hommachou da Zoue!

Placen Ilis Sant Jacques a voa guechal ornet
Eus ur Groas men, ar gaera a oufjet da velet,

Sant Jacques ha Sant Christoph, peziou voa hep o far,
 Mes brizillonet int bet eno gant tud barbar!

Ebars ruyou Montroulez ne rejet qet ur pas
 Hep eus hon Religion guelet merqou all c'hoas :
 Perzier qær, calz a dies a Zent voa decoret ;
 Mes, evel an Ilizou, oll int bet distrujet.

Bars er bloa seitec cant seiz, an ugent a Voere,
 E varvas Frances Jagu, Person a Sant Vaze,
 Leshanvet ar Viqel-Zant dre bêvar c'horn ar vro :
 Pedomp-én a vouir galon, Doue hor sicouro.

E blijadur voa bepret ober vad d'ar beorien,
 Hac eus a greis e galon instru ar Gristenien ;
 E vertuz, e veritou, hac e vuez santel
 A ra ma zeo veneret dre oll en Breiz-Izel.

E penn bêred Sant Vaze, a harp eus ar Garnel,
 A ziouc'h e vez voe savet d'e enor ur Chapel ;
 Eno an oll admire portret ar Viqel-Zant,
 Qer joaüs, ma lavarjet e vije o parlant.

Nac a vugale yaouanq zo bet dezàn goestlet,
 Evit goulen e zicour ebars en o c'hlénvet !
 Guelet a reomp bemdez graguez o vont gante
 Da accomplissa vœuyou grêt d'an den zantel-se.

Calz a dud so o teport ma vo canoniset ;
 Ni, Montroulezis, hon eus atao ze deziret.
 Pedomp Doue a galon ma velimp an dra-se,
 Hac ive plaç e Imach en Ilis Sant Vaze.

Pelec'h medi an amzer en pini e velet,
 Achapet eus an tempest, hac er porz arruet,
 Ar vartolodet Christen o tont d'accomplissa
 Vœuyou da Ilis ar Vur, en ur stat an trista !

Eus o lestr e partient, hep habit na besten,
 Hep toq, na louer, na boutou, en o dorn ur ciergen,
 En ur gana assambles *Ave, maris stella,*
 Ar pez certen a laç ar galon da ranna.

Rentet en traon r pasiniou demeus an Templ divia

En em stringent d'an douar var bennou o daoulin :
 Pardon ! pardon ! emezo, pardon ! ô Mam Doue !
 Penevert ho madelez ne voamp get en bue.

Neuze pignent d'an Ilis, leun eus a drugarez,
 Elec'h ma vije canet dê Ofern ar Verc'hez.
 Pebes fervor o devoa ! pebes devotion !

Ah ! pebes triumph ive vit ar Religion !

Ret eo din despeigni dêc'h breimâ ar Verc'hez-mâ,
 Rac calz ac'hanoc'h biscoas na velas ur seurt tra :
 Sellit-hi peguen tener, peguen carantezus
 E teu da rêy da zena d'he Mabiq qez Jesus !

Peguen admirabl e zeo e guelec digoret !

En e c'hreiz e contempler tri Ferson an Drindet,
 Hac en e diou gostezen e veler gant eston
 Peinturachou ar c'haera eus ar Religion.

Nebeut Touriou a velet, me a ell en assur,
 Da veza comparachet demeus Tour caer ar Vur,
 Nac Ilis a inspire mui a zevotion
 Eguet sur ma rê hini hor Mam hac hon Itron.

Ebars en amzer horrubl ar Revolution
 Ne velem en dro deomp-ni nemet destruction.
 Hac un dra ar c'hraella voa guelec, a dra sur,
 Dont da zistruch, dre arrach, Ilis santel ar Vur.

Hor Batronez voe neuze chaset eus e zi,
 Casset da Sant-Dominiq, hac ar C'hrist bras ganti ;
 Ha goude e voent placet en Ilis Sant Vaze,
 Mes ar Verc'hes so hirio en he Chapel neve.

Pa voe dic'hradet ar Vur er Revolution,
 Voe grêt anezi un Templ, hanvet Templ ar Rêson.
 Mes rên an Douees-mâ ne badas get guel bell ;
 Ne reas nemet tremen, vel ma ra an avel.

An Ilis a voe neuze souden eta guerzet,
 Ha qerqent e voe ivez en antier discaret ;
 An Tour a chomas neuze izolet goude-se,
 Hep souten e nep costez evit e surete.

O Doue ! pebes maleur a êruas goude !

Fremissa ra va c'halon pa zonzan c'hoas en se...

Va goad a deu da sclassa, va daelou da redet,

Va fluen a grèn em dorn, va speret zo troublet.

An eiz varnuguent a Veurz, un devez a voener,
Bars er bloa mil eiz cant c'houec'h, oll habitantet qær

Occupet vel ordinal demeus o afferou,

Ne zonzent qet marteze ebars en maleuriou.

Goude lein, vardr'o un heur, Tour ar Vur a fraillas,

Ha gant un drous horrerus prest ractal a goeas;

An oll dud eus ar c'hartier voe qement spouronet,

Ne vouient qet pelec'h chom nac en pelec'h monet.

Ar Mèr hac ar Sou-Prefet qerqent a êruas,

Ha calz demeus a guæris ivez en em rentas;

An oll voa leun a galon evit douguen sicour

D'an dud a voa entêret eno didan au Tour.

Ar Zacrist voe ar c'henta a deujot da gavet;

Beo e voa, dre c'hraç Doue; mes allas ! goal vlesset..

Pemp den all a voe lazet, hac ur buguel nao bloas

Voe cavet dindan un dol, mes hemàn a vev c'hoas...

An dri eus a vis Even eus bet seitec vloas voe

Goüel Canonisation Santez Angel ive

Ebars er Gouent-neve, elec'h ma voe placet,

Evel guir Fondatorez d'an Ursulineset.

Sant-Vaze dré e c'hosni, a voa bet condaonet

Da veza prest discaret, hac e voe en effet.

Mes dre generosite Christenien Montroulez,

E voe construet goude un Ilis gaer nevez.

An deiz diveza qerzu, mil eiz cant pemp varnuguent,

E voe beniguet an Ilis, dre c'hraç Roue ar Zent;

Ar deiz varlerc'h, ar c'henta demeus a vis guenver,

Voe an oferent guenta ebars templ ar Zalver.

D'al lun, eiz a Voengolo, er bloavez tremenet,

Chapel Itron Vari ar Vur a so bet dediet;

E penn bêred Sant Vaze, gant calz solemnite,

E pelec'h voa n'em gavet nombr tud eus ar c'hontre.

Autrou'n Abat Lansalut, chaloni côs ar Vur,
A venigas ar Chapel gant ur joa nobl ha pur;
Autrou Kvenic, Person eus a Barros Taule
A sermonas ouz a harz croas caer ar jubile.

An oferen voe canet bars er Chapel neve,
Ha da deir heur gousperou en Ilis Sant-Vaze :
Autrou Graverand, Person Brest, neuze a brezegas
Var ar sujet a zalc'he d'ar solemnite vras.

Qerqent ar procession a so bet commancet,
Hac Itron Vari ar Vur gant bêleyen douguet,
En eur gana melodi Mari, Mam da Zoue,
Ha neuze voe deposet en he Chapel neve.

Guechal en Ilis ar Vur e vije ar pardon
Deiz gouel an Drindet santel, gant peb devotion ;
Brethâ vo hivisiqen grêt er Chapel neve,
Elec'h ma vo celebret gant peb solemnite.

Guelet a reomp hirio, gant calz demeus a joa
Un Ilis côs rentet deomp, abandonet pell voa :
Couent Sant Frances, elec'h ma voa recoleset ;
Hac a so bremâ dalc'het gant al leanezet.

Cetu aze, Bretonet, ar pezh so êruet
Er guær eus a Vontroulez, en amzer dremenet.
Contant ven eus va Recit, ma elfe dont aben
Da gresqi ar guir ferveur etouez ar Gristenien.

Qement-mâ so bet reizet bars en un urz neve ;
An daouzec eus a vis mac, deiz pasq ar vugale :
Græc dezo da gaout soneh ouz un deiz qen glorius,
Ha da veza da james bugale da Jesus.

Ar voerz-mâ so composet gant calz a blijadur,
Gant ur C'holistr ancien eus a Ilis ar Vur,
Pini so bet test guirion demeus a veur a dra,
A ro da anavezout ebars er recit-mâ.

FIN.